

# NIVERIDIGEZH ?

Abaoc'h pell 'zo ez eus kaoz da reiñ e blas d'ar brezhoneg er vuhez foran. Ur wellaenn eo ar cheñchamant politikel zo bet warlene, met ne droio da vat gant ar brezhoneg nemet ma zo trawalc'h a dud o stourm evit bountañ an traoù war-raok.

Gant ar spered-se an hini eo e vez roet lañs da "Stourm ar panelloù-lec'h". N'eo ket trawalc'h evit ma vo roet e blas d'ar brezhoneg er velestradurezh, re all a rankimp kas war-raok e-pad pell c'hoazh...

Gant ur stourm arouezel e rankomp kregiñ : daoust hag ur simbol gwelloc'h a vefe eget "niveridigezh hollek ar boblañs". Ur seurt niveridigezh 'zo just a-walc'h arouez darempredoù ar Stad gant ar sitoian. Evel ouzh ur mekanik-produiñ e sell outañ ha n'eo ket evel ouzh un den. Ne servij an niveridigezh nemet da ziskoulmañ kudennoù arc'hant, ekonomiezh ha mererezh, met ne zalc'h ket kont deus an den, deus e yezh, deus e sevenadur...

Goulenn peseurt yezh a vez kaozet gant ar sitoian a vefe lakaat ar "gwir da vezañ disheñvel" da dalvezout. Ober ar goulennoù gant follennoù divyezhek a vefe digoriñ an hent d'ar brezhoneg er velestradurezh, er vuhez foran... Mes kement-se ne vo ket graet gant niveridigezh miz Meurzh 1982, setu pezh 'zo bet skrivet deomp gant an INSEE.

Neuze,

## NE RESPONTIMP KET

Respont e brezhoneg war follennoù gallek ? N'eus ken 'met kroazioù bihan da lakaat ! Ha n'eo ket ar gwir da gaozeal brezhoneg a c'houlennomp, ar gwir-se hon eus kemeret-ni dija... Ar gwir e vije kaozet brezhoneg deomp gant ar Velestradurezh, setu ar pal.

## stourmit ganeomp

## NAC'HIT IVEZ

## AL LEZENNOU

En em c'houll a rit marteze peseurt mod 'vo kont ganeoc'h ma nac'hit respont... Daou lizher vo kaset deoc'h, o c'holl displegadurioù. Un taol-kastiz bihan 'zo sañset bezañ, met ken luziet ha ken pounner eo al lezennoù, ken n'int ket bet lakaet da dalvezout morse.

Tout an dud a c'hell chom hep respont, neuze.

## PENAOB OBER 'VIT KEMER PERZH ER STOURM ?

M'emaoc'h prest da gemer perzh er stourm, n'ho peus ken 'met

- kas ar follennig deomp : evel-se e c'hellimp... niveriñ ac'hanoc'h 'vit kaout ur stourm efedusoc'h ha kas keleier deoc'h pa vo ezhomm.
- tap ar follenn hiniennel ha reiñ unan deus al lizhiri en he flas (gant ho chomlec'h hag ho sinatur).
- mirout ar follenn hiniennel : be c'hello servij warlerc'h, 'vit manifestiñ.
- kas ul lizher all da Vinistr an Ekonomiezh. 93 rue de Rivoli. 75056 PARIS RP.
- gortoz ur pennadig ma vije skrivet deoc'h ha, benn neuze, kas ul lizher all dezhe.
- ha kas keleier deomp pa c'helloc'h.

## PETRA A C'HELLIT OBER 'VIT AOZAN AR STOURM GANEOMP ?

- aozañ emvodoù dre embann kemenadennoù er c'helaouennoù.
- skignañ doserioù 'giz hemañ tro-dro deoc'h : d'ho mignoned, er gouelioù, er festoù-noz, en tavarnioù hag en ostalirioù... goulit re all ganeomp. Bez 'po kement ha m'ho po ezhomm.

## M'HO PEUS UR GUDENN BENNAK, PE MA NE GOMPENIT KET TRA PE DRA

e c'hellit skrivañ deomp : SKOL AN EMSAV  
"Niveridigezh"  
8 straed Hoche  
35000 ROAZHON

pe pellgomz : 16 (99) 30.90.15 d'al Lun

Meurzh noz etre 9 eur hag 11 eur.  
Merc'her

Ne respontin ket da niveridigezh miz Meurzh 1982.

ANV :  
CHOMLEC'H :  
NIVERENN PELLGOMZ :

Aotrou,

N'hellan ket respont da follenn hiniennel niveridigezh hollek ar boblañs. Ne gavan enni nemet goulennoù graet a-berzh ar Stad ouzh ur sitoian-mekanik-produiñ ha n'eo ket ouzh un den.

N'eo ket bet lakaet ar "gwir da vezañ disheñvel" da dalvezout o c'houlenniganin peseurt yezh e kaozean e-barzh ma buhez pemdeziek.

E galleg eo bet graet an holl follennoù hag ur wech ouzhpenn e vez dalc'het da vougañ ar yezhoù bihan e-barzh ar velestradurezh.

Ne welan ket aze ar cheñchamant e oan o c'hortoz e-barzh an darempredoù etre ar Stad hag ar sitoian. Pell emamp aze diouzh an "danvez-lezenn war yezhoù ha sevenadurioù pobloù ar Frañs" bet kenniget gant deputeed ar P.S. a-raok ar votadegoù diwezhañ.

Esperañs 'meus e talc'hoc'h kont eus an evezhiadennoù-se e-barzh an niveridigezh a zeu, hag e c'hellin neuze respont dezhañ divorc'hed.

Pediñ a ran ac'hanoc'h, Aotrou, da gre-diñ e-barzh ma youl a cheñchamant.

# RECENSEMENT ?

Depuis longtemps il est question de donner à la langue bretonne sa place dans la vie publique. La victoire de la gauche est un progrès, mais notre langue ne profitera du changement que si nous sommes assez nombreux à agir en ce sens.

C'est dans cet esprit que nous avons lancé la campagne de rebretonnisation des panneaux routiers. Ce n'est pas suffisant, pour donner au breton sa place dans l'administration, il faudra mener bien d'autres campagnes, pendant longtemps encore.

Nous devons commencer par des actions symboliques. Existe-t-il meilleur symbole des relations entre l'Etat et le citoyen que le "recensement général de la population" ? Le citoyen y est considéré en tant que machine à produire, et non en tant qu'individu à part entière. En effet, ce recensement ne sert qu'à enquêter sur des problèmes financiers, économiques et administratifs, mais il ne tient aucun compte, ni de la langue, ni de la culture des personnes auxquelles il s'intéresse. Une façon de faire valoir le "droit à la différence" serait de demander quelle langue parle le citoyen. La mise en place de formulaires bilingues ouvrirait la voie au breton dans l'administration, dans la vie publique. Mais l'INSEE se refuse à nous accorder ces droits.

Aussi,

**NOUS NE  
REPONDONS  
PAS**

Il ne saurait être question de répondre en breton sur des formulaires en langue française, car il n'y a que des cases à cocher, ou presque. Mais ce n'est pas le droit de parler breton que nous demandons. Ce droit nous l'avons déjà pris. Utiliser le breton dans toutes nos relations avec l'administration, voilà notre but.

**luttez avec nous  
REFUSEZ AUSSI**

## LA LEGISLATION

Peut-être vous demandez-vous ce qui arrivera lorsque vous refuserez de répondre. Le comité du contentieux vous adressera deux lettres pour vous demander des explications. Une légère amende est prévue par la législation, mais celle-ci est si compliquée qu'elle n'a jamais été effectivement mise en application.

Tout le monde peut donc participer à cette campagne de refus.

## COMMENT ?

- en nous adressant le bulletin prévu à cet effet pour que nous puissions... vous recenser et ainsi coordonner l'action pour une plus grande efficacité.
- en conservant le bordereau individuel qui vous sera remis en mars par l'agent recenseur : il pourra servir ultérieurement au cours d'une manifestation.
- en lui remettant en échange l'une des lettres avec votre signature et votre adresse.
- en envoyant la seconde lettre au Ministère des Finances, Jacques Delors, 93 rue de Rivoli, 75056 PARIS RP.
- en expédiant la troisième lettre après la demande d'explication du comité du contentieux.
- en nous informant quand vous le pourrez.

## VOUS POUVEZ AUSSI ORGANISER L'ACTION AVEC NOUS

- en organisant des réunions et en informant la presse.
- en diffusant des dossiers comme celui-ci autour de vous dans les fêtes, les festoù-noz, les tavernes et les auberges...  
Demandez-nous d'autres exemplaires. Nous pouvons vous en fournir autant que vous en aurez besoin.

SI VOUS AVEZ UN PROBLEME, OU SI VOUS NE COMPRENEZ PAS QUELQUE CHOSE

vous pouvez nous écrire : SKOL AN EMSAV  
"Niveridigezh"  
8 straed Hoche  
35000 ROAZHON

ou nous téléphoner : 16 (99) 30.90.15 le lundi, mardi ou mercredi soir  
entre 9 heures et 11 heures.



# SKOL AN EMSAV

Monsieur,

Je ne puis répondre au bordereau individuel du recensement général de la population.

C'est au citoyen-machine-à-produire que l'Etat s'adresse et non à l'individu en tant qu'être humain.

Il ne met pas le "droit à la différence" en application en me demandant quelle langue j'utilise dans ma vie quotidienne.

Les formulaires sont en langue française et l'administration poursuit sa politique d'oppression à l'égard des langues minoritaires.

Je ne retrouve pas là le changement que j'attendais dans les rapports entre l'Etat et le citoyen. Nous sommes bien éloignés du préambule au "projet de loi sur les langues et cultures des peuples de France" proposé par les Députés Socialistes avant les dernières élections.

Je conserve l'espoir que l'on tiendra compte de ces quelques remarques lors du prochain recensement.

Je pourrai alors y répondre sans regret.

Je vous prie, Monsieur, d'agréer l'expression de ma volonté de changement.